

CANTIC

AN

AUTROU SANT ROCH



*Var ton : Sant Tanguy a Santez Eodette,
pe : Santez Mari.*

Canomp gant meuleudi, canomp gant joaüsdet
Ur c'hantic neve flamm evit gloar an Drindet,
En enor da Sant Roch, servicher da Zoue,
En deus evit partaj rouantelez an Ee.

En ur c'hartier a Franc, er vro a Languedoc,
A dud a ligne vad e ze ganet Sant Roch ;
He dad voa hanvet Ian, he vam a voa Tiber,
A re ho demeureans er guer a Vompellier.

Sant Roch ne heuille ket epad he iaouankiz.
An dans hag an ebat evel m'eman ar c'his :
Occuped de ha nos gant Doue er beden,
E castie he gorf gant yun ha pinijen.

Goude maro he dad e versas he voyen,
Hag e tistribuas an arc'hant d'ar beorien.
Neuze guisket e paour e kemer penn an hent,
En ur laret kenavo d'he vro, d'he gerent.

Evit monet da Rom da ober he beden
Var be an Ebestel a re ar verzerrien.
Pa arruas e Rom en em lacas ractal
Da servich an dud clan ebars en hospital.

Ur vossen arrajet a re en amzer ma
Ravaj er ger a Rom hag er c'herriou nessa :
Sant Roch dre zin ar groas, hep remed all ebet,
A vellaë tud clan, hag a roe ar yec'het.

C'houi a zo admirabl, ma Jesus, ma Autrou,
Dreizoc'h e teu ar Sent da ober miraclou ;
Gret ur memes mirac'l en andret hon ene :
Roet ar yec'het d'hor c'horf a nerz d'hor c'harante.

Doue a bermetas ma vije affliget
He servicher fidel ive gant ar c'hlenved.
Ouspen an dersien dom, evit lavaret guir,
He vorzet voe treuzet ive gant un tenn birr.

O veza rentet yac'h e kemer he zessin
Da zistroï d'he vro gant bas eur pelerin.
Mes chom a eure clan en ur c'hoat estranjour
E lec'h na gavas den da rei dezan sicour.

Setu aze penoz eo tretet gant Doue
A re pere o deuz vinta guir garante.
Mes ki un dizentil, ac'hane deuz ar vro,
A zigasse dezan bara en he c'hino.

Doue 'n deus gouzanvet nombr bras a souffransou,
A zo evidomp oll antreet en Envou.
Ma Doue, c'houi zo mad, c'houi zo carantezus,
Na servichin biken nemedoc'h, ma Jesus.

Bras eo, o ma Doue, bras eo ho providans !
Me a lacai ennoc'h ive ma oll fian.
Erfin, dre gals a boan a dre gals a viser
Sant Roch en em rentas er guer a Vompellier.

Mes kemeret e voe evit un espion,
A destumet ractal ebars en ur prison.
Sant Roch so innosant hag a zo prisoniet,
Tolet er bassefos hep beza meritet.

A me, o Jesus ! Saotret gant ar pec'het,
Ne fell din souffr netra gant guir bassiantet :
Gourveet var ar plous, guisquet fall, dierc'hen,
Sant Roch ne lavar guer, na da zen ne n'em glem.

Chom a ra er guisse pemp bla en he brison
Heb cavout digant den nep consolation.
Ha daoust d'he oll anken e teuas c'hoas ouspen
Da veza affliget ive gant ar vossen.

Santout a re e voa erru tost an termen
Ma iaje da receo en Env he gurunen,
A ma c'halje, varlerc'h he dourmanchou cruel,
Caout digant he Salver plijadur eternal.

Kent quittât ar bed-man, ebars en he brison,
E reas he beden da Zoue, a galon,
Evit ar re pere e vije affliget
Gant clenvejou euzus ha dangerous meurbet.

Diganec'h e c'houllen, ma Jesus souveren,
Evit ar re vo clan gant fluz hag ar vossen,
M'ho do soulajamant en ho affliction
Pa deuint d'am pedi, deuz a greiz ho c'halon.

Mervel a ra neuze, evel ma varv ar Sent,
Er blavez trizec cant, da seiz bla varnuguent.
He ene evurus a voe gant joaüsdet
Douguet gant an Ele da bales an Drindet.

Goude ma zoa maro, e voe anaveet
Dre ur groas a voa var he gorf imprimet.
An oll bihan a bras a rent dezan neuze
An enor na roer ket memeus d'ar rouane.

Deus he gorf precius nep a elle tostât
A gemer relegou hag ive he ziliat.
Guir eo, o ma Jesus ! ar pezh oc'h euz laret :
Nep a n'em izelai a vezo huellet.

Canomp gant joaüsdet, canomp gant meuleudi
Da Zoue, da Sant Roch ha d'ar Verc'hes Vari,
Ha na heanomp ket o veuli an Drindet,
Ennes eo guir dever an oll gatoliket.

Pedomp oll ar Sant-man euz a greiz hor c'halon,
Ma teuio d'hor zicour en hon affliction.
Pedomp-en da c'houlén deomp digant Doue
Hag ar yec'het d'or c'horf hag he c'hraç d'hon ene.

AMEN.

Approuvé la réédition :

F. OLLIVIER, vic. gén.